

13

Bro Frans enn he zristidigez
 Ouzoc'h a zell gant fizians ;
 Ar Frans zo ho rouantelez,
 Chui a zo he esperans.

14

'Vit hor bro ni deu d'ho pedi,
 O Mari, hor chelaouit ;
 Ar peoc'h a nevez roit d'ezhi
 O Mari he zikourit.

15

O Itron Varia 'Gleden
 Hed hor bué beillit varnomp
 Ha dreist pep tra var hon tremen,
 Mam dous, pedit evidomp.

Quimper, 8 Août 1892.

IMPRIMATUR

A. SERRÉ, vic. cap.

Keraez, Moullerez Ar Bobl.

KANTIK

DA

Itron Varia 'Gleden

1


Pardonnerien, deut da Gleden
 Da henori ar Verc'hes,
 Kinnigomp d'ezhi hor peden
 Ha kanomp oll assambles.

Diskan :

O Itron Varia Gleden
 Binnigit ho pugale,
 Deus an Envou deut d'hen difen
 D'hor sikour e pep mare.

2

Gout a rit, hor Mam binniget,
 Eo bras hor sempladurez,
 Nemet ganoc'h vemp skoazellet,
 Koueza sur raimp alies.



3

An ifern dre dud kounaret
 A ra brezel domp hemde,
 Biken gante na vimp treç'het
 Ma vezit deus hor c'hoste.

4

Deut 'ta gant ho torn galloudus
 D'hon harpa ha d'hon difen,
 Evit ma vimp krenv ha nerzuz
 Enep hon encbourien.

5

Kant ha kant guech pelerinet,
 'Vit ho c'horf hag ho ene,
 O'veza d'oc'h en em voestlet,
 Ho deus kavet ar pare.

6

Kement den a zo e glac'har,
 Ni ho ped, Guerc'hes Vari.
 Var ar mor pe var an douar,
 Deut buan d'her c'honsoli.

7

Ar soudard iaouank pa velfed
 O vouela pell deus he vro
 Astennit ho torn benniget
 Da zec'ha d'han he zaelo.

8

D'ar chlanvour kez var e vele,
 Dale'hit, Mari, da c'houlen
 Gras ha sikour digant Doue
 Da herzel ouz he anken.

9

Ha d'ar bec'herien kaledet
 Grasou ar gonversion,
 D'hor c'herent ha d'hor mignonet
 Roif dalc'h mad protection.

10

Grit iveau, hor Mam benniget,
 Eur zell leun a garante
 Ouz an dud a zo dibabet
 D'hon hencha a berz Doue.

11

'Vit hon Tad santel, Mam dener
 Ni ginnig d'och hor peden ;
 Beillit varnan e peb amzer ;
 Treç'hit he henebourien.

12

Diganoc'h c'houlenomp ive
 'Vit kerent ha mignonet,
 Er purkator pell deüz Doue,
 A boan e vent tennet.